Ever

Alan Stivell

Darn 'zo difiñv, darn a gemm Darn a vroud ha darn a flemm Darn a dav ha darn a glemm

Darn a zistag darn a stag Darn a zifenn darn a dag Dam a yun ha darn a vag A-viskoazh ha da viken Egile zo mab d'eben Ar vuhez ha netra ken

Etre tamall ha torfed Darn a dou ha darn a bed Darn 'zo ganet dibec'hed

Darn 'zo glan ha darn zo pur Darn 'zo foll ha darn zo fur Darn 'zo kablus dre natur

Darn a samm ha darn a zoug Darn a jahin darn a voug Darn a yud ha darn a groug

Darn a vale darn a nij Darn 'zo heg ha darn a blij Darn a gren ha darn a skrij

Darn 'zo bleiz darn zo ki Karantez, kasoni Sko kaled, sko hardi Mont waraok pe mont war souz ? Chaokat foenn pe chaokat plouz ? Krougousat pe ober trouz ?

Heklew ha dasson da vat Sko a-skizh ha sko a-blad Choukomp de'i ha yec'hed mat

Sko a-dreuz ha sko a-hed 'vit lazhañ Kiez ar bed Sko ha sko ha sko bepred A-viskoazh ha da viken...

Etre gwigour ha storlok Darn a c'hoarzh ha darn a sklok Darn'zo lent ha darn 'zo rok

Diwar anken, diwar spi Diwar joâ pe gasoni Koroll ha kan tra ma vi

Mervel gorrek amzer 'zo Bevañ betek ar marw Tra ma vimp ha ken a vo

Trec'h an delenn d'an Ankoù

Il y a ceux qui sont inertes et ceux qui changent Ceux qui sont venimeux et ceux dont l'aiguillon stimule Ceux qui se plaignent et ceux qui se taisent

Il y a ceux qui libèrent et ceux qui entravent Ceux qui se défendent et ceux qui agressent Ceux qui font maigre et ceux qui font gras Depuis toujours et à jamais Tout homme nait d'une femme C'est la vie qui compte et c'est tout

Entre l'accusation et crime Il y a ceux qui jurent et ceux qui prient Et ceux qui sont nés sans pêcher,

Il y a ceux qui sont purs, ceux qui sont sans tache Ceux qui sont fous, ceux qui sont sages Ceux qui sont coupables dès le berceau

Il y a ceux qui portent leurs fardeaux plus ou moins bien Ceux qui torturent, ceux qui étouffent Ceux qui hurlent et les étrangleurs

Il y a ceux qui marchent et ceux qui volent Ceux qu'on déteste et ceux qu'on aime Ceux qui tremblent et ceux qui frémissent

Certains sont des loups, d'autres des chiens Que ce soit par amour ou haine Frappe fort a coups redoublés

Aller de l'avant ou rebrousser chemin ? Parler jargon ou baragouin ? Roucouler ou faire du bruit ?

Echo toujours répercuté Frappe de biais ou de plein fouet A ta santé et allons-y

Frappe à tord et à travers Pour tuer la Chienne du monde Frappe frappe et frappe toujours.

Que cela grince ou bringuebale Il y a ceux qui rient et ceux qui gloussent Les timides et les arrogants

Pour conjurer l'angoisse ou libérer l'espoir Pour exprimer la joie ou expluser la haine Danse et chante jusqu'à la fin

Rien ne presse, prenons le temps De vivre pleinement jusqu'au bout Tant que nous seront là et tant que La harpe sera plus forte que la mort